

n 22
AN AOTROU

AUGUSTIN AR MINTIER

DIVEZA ESCOP TREGER.

MONSEIGNEUR

AUGUSTIN LE MINTIER

DERNIER EVÈQUE DE TRÉGUIER.




Gwerz ann aotrou **AUGUSTIN-RENÉ
AR MINTIER**, diveza Escop
Treger, maro e Londrez, e Bro-Zaoz,
ann 21 a viz ebrel 1801, ha digaset
he relegou da Iliz-Veur Landreger,
ann 8 a viz gouere, er bloavez 1868.

DA ESKIBHEN BREIZ

HON TADOU ER FEIZ

Mementote præpositorum vestrorum qui
vobis locuti sunt verbum Dei : Quo-
rum intuentes exitum conversationis
imitamini fidem. (*Hebr.* , ch. XIII,
v. 7.)

*Dalc'het sonj euz ar bastoret o deuz
prezeget d'e-hoc'h komzou Doue,
hag o welet penoz ez int maro,
bezit evel-d-ho tud a feiz. (St-Pol,
d'ann Hebr., ch. XIII, v. 7.)*



War don : *Kerloc'h, kousk e peoc'h, va mignon, beleg
mad oud bet ha guirion.* (Télen Remengol, p. 52.)

I.

Ann oabl, siouaz ! a zo tenval,
Ann avel foll zo o voudal !
Ne weler e bolz ann envou
Nemet tan, luc'hed, kurunou !...

À la mémoire de Monseigneur **AUGUSTIN-RENÉ LE MINTIER**, dernier Évêque de Tréguier, mort à Londres, en Angleterre, le 21 avril 1801, et dont les restes mortels ont été transférés à la Cathédrale de Tréguier, le 8 juillet 1868.

AUX ÉVÊQUES DE BRETAGNE

NOS PÈRES DANS LA FOI

Mementote præpositorum vestrorum qui vobis locati sunt verbum Dei : Quorum intuentes exitum conversationis imitamini fidem. (*Hebr.*, ch. XIII, v. 7.)

Souvenez-vous de vos pasteurs qui vous ont prêché la parole de Dieu; et en voyant comment ils sont morts, soyez comme eux des hommes de foi. (St-Paul, Hébr., ch. XIII, v. 7.)



Sur l'air : *Kerloc'h, ô mon ami! repose en paix, tu as été un bon et loyal prêtre.* (La harpe de Rumengol, p. 52.)

I.

Le ciel est noir, hélas!
Le vent en fureur souffle avec fracas,
On ne voit sous la voûte des cieux,
Que feu, éclairs, foudre et tonnerre.

Krozal spontuz a ra ar mor,
Eur vantel bloum c'holo 'nn Arvor;
Goad a weler war ann douar!...
Ma Doue! na pebez glac'har!...

Jezuz, ann ilizou santel
A zo serret e Breiz-Izel;
Ho Kroaz ma mui war ann touriou
Nag er vered war ar besiou...

Enn tabernakl war an aoter,
Enn Iliz-Veur à Landreger,
N'emoc'h mui, Jezuz, ma Doue,
Sec'ha daelou ho pugale.

Sent Breiz-Izel na weler mui
Nag HOR MAMM AR WERC'HEZ-VARI,
Siouaz! siouaz! pebez diroll!...
Ar bed a zo o vont da goll!...

E Landreger, toull ann ôr dal,
Enn Iliz-Veur sant Tugdual,
Pa zon klemuz ann anter-noz,
E voa daoulinet eunn den koz.

Dispak voa gant-han he vleo-gwen,
Hag he dal pleget er boultren;
Hen-nez eo Augustin MINTIER,
Den Doue, Eskop Landreger.

Hag e ouele hag e pede
Jézuz-Krist 'vit he vugale,
Sant Tual, Ervoan ha sent Breiz;
He galon fraille enn he greiz.

Pa voa gret gant-han he beden,
Tec'haz 'kreiz ann devaligen,
Oc'h hirvoudi hag o pedi
Evit Breiz ar Werc'hez Vari.

La mer mugit à faire frémir ;
Un manteau de plomb couvre l'Armorique
On voit du sang sur la terre !...
O mon Dieu, quelle épouvante !...

Jésus, vos églises saintes
Sont fermées en Bretagne ;
Votre Croix n'est plus sur les clochers,
Ni dans les cimetières sur les tombeaux.

Dans le tabernacle de l'autel
De la Cathédrale de Tréguier,
Vous n'êtes plus, Jésus, mon Dieu,
Essuyant les larmes de vos enfants.

On ne voit plus les saints de Bretagne,
Ni NOTRE MÈRE, LA VIERGE-MARIE...
Hélas ! hélas ! quel bouleversement !
Le monde se précipite vers sa ruine...

A Tréguier, à la grande porte
De la Cathédrale de saint Tugdual,
Quand minuit sonnait tristement,
Un vieillard était prosterné...

Ses cheveux blancs volaient au vent,
Son front dans la poussière,
C'était Augustin LE MINTIER,
Homme de Dieu, évêque de Tréguier.

Et il pleurait !... et il priait Jésus-Christ,
Pour ses enfants, il priait saint Tugdual,
Saint Yves, tous les saints de Bretagne...
Et son cœur se brisait dans sa poitrine.

Sa prière achevée, il s'enfuit
Au milieu des ténèbres,
Gémissant et priant pour
La Bretagne, la Vierge-Marie.

« Itron Wir Zikour, c'houi hor Mamm,
« Hor Patronez vad a Wengam,
« Taolit evez, enn hanv Doue,
« War Tregeriz, ma bugale. »

War ar mor o vont da Vro-Zaoz
Da Vreiz e ro c'hoaz he Vennoz :

— « Kenavo, ma bro Breiz-Izel,

« Bro ar sent hag ann dud santel... »

Mervel 'ra ann Eskop MINTIER,
E Londrez evel eur merzer...
Tregeriz, maro eo ho tad,
Ho mignon hag ho pastor mad.

Maro eo pell dioc'h Breiz-Izel,
Pell dioc'h he veleien santel ;
Mervel a zo eun dra c'houero,
Pa varver pell, pell dioc'h ar vro !

II.

NAN!... ar bed ne ket et da goll...
Setu Gwerc'hez Vad REMED-HOLL (1),
War eur goumoulen arc'hantet,
Asten he dorn d'ar Vretonet !

Ann ilizou a zo digor,
Sent Breiz zo distro enn Arvor ;
Ar bar-arne zo tremenet,
Hag hano Doue zo meulet.

(1) Ar Werc'hez a zo enoret e Remengol dindan ann hano kaer a itrou Varia REMED-HOLL.

« Notre-Dame de Bon-Secours, notre Mère,
« Notre bonne patronne de Guingamp ;
« Veillez, au nom de Dieu,
« Sur les Trégorois, sur mes enfants. »

Sur les flots et se dirigeant vers l'Angleterre,
Il donne encore une fois sa bénédiction à la

[Bretagne :

— « Adieu, mon pays, disait-il ; adieu, *Breiz-*

[*Izel,*

« Pays des saints et des hommes de foi. »

L'évêque LE MINTIER meurt à Londres,
Comme un martyr..., habitants de Tréguier,
Votre père, votre ami,
Votre bon pasteur est mort....

Il est mort loin de la Bretagne,
Loin de ses saints prêtres...
Mourir est chose amère
Quand on meurt loin... loin de son pays.

II.

NON ! le monde n'est pas encore perdu...,
Voilà la bonne Vierge de TOUT-REMÈDE (1),
Sur un nuage argenté,
Elle tend la main aux Bretons.

Les églises sont ouvertes
Les saints Bretons sont revenus en Armorique,
L'orage est passé,
Le saint nom de Dieu est loué.

(1) La sainte Vierge est honorée à Rumengol, sous le beau nom de Notre-Dame de TOUT-REMÈDE.

Da Remengol ha da Wengam,
Pelerinad ia neve flamm.

Da Josselin ha da Vulat,
Da Rostren ha da Gelou-Mad (1).

Mont a reont enn eur gana
D'ar Werc'hez *Ave Maria*,
Enn ho dorn ma ho chapeled,
Vont da Santez-Anna Wened (2).

Deut oc'h en dro, aotrou MINTIER,
Da choum da iliz Landreger ;
Gan-hoc'h eo deut Eskibien Breiz,
Han tadou, Ebestel hor feiz.

Digant ar Pap ni hor beuz bet
Eunn Eskop gant ann holl karet,
Eveld'oc'h hanvet AUGUSTIN,
Mad evel ar Pastor divin.

Pi Nao deuz roet dar Vretonet,
Eunn Arc'heskop santel meurbet ;
Den a skiant, den a galon,
Eun tad mad, arc'heskop Roason.

Eskop santel ho relego
Barz iliz Landreger choumo,
Gant sant Ervoan, santez Seva,
Sant Tual, santez Pompeia (3).

(1) Ann Itron Varia *Kelou-Mad*, e Roason.

(2) Brezonnek ve lavaret Santez-Anna *Wened* ha nan
Santez-Anna ann *Alre*.

(3) Santez Pompéia voa mamm da sant Tugdual, da sant
Léonor ha da santez Séva.

A Rœmengol et à Guingamp
Des pèlerins s'en vont de nouveau en pèleri-
[nage,

A Josselin, à Bulat, à Rostrenen,
A Notre-Dame de Bonne-Nouvelle (1).

Ils s'en vont en chantant
A la Vierge : *Ave Maria* !
Ils ont dans la main leur chapelet,
En allant à Sainte-Anne d'Auray (2),

Vous êtes revenu, Monseigneur LE MINTIER,
Demeurer dans votre église de Tréguier,
Les évêques de Bretagne, nos pères,
Les apôtres de notre foi, vous accompagnent.

Le Saint-Père nous a donné
Un évêque aimé de tous ;
Comme vous il se nomme AUGUSTIN ;
Il est bon comme le divin Pasteur.

Pie IX a donné aux Bretons
Un saint archevêque,
Un sage, un homme de cœur,
Un bon père, l'archevêque de Rennes.

Evêque saint, vos reliques demeureront
Dans l'église de Tréguier
Avec saint Yves, sainte Sève,
Saint Tugdual, sainte Pompée (3).

(1) Notre-Dame de *Bonne-Nouvelle*, à Rennes.

(2) En Breton, on dit Sainte-Anne de *Vannes* et non pas
Sainte-Anne d'Auray.

(3) Sainte Pompée était mère de saint Tugdual, de saint
Léonor et de sainte Sève.

Feiz Jezuz-Krist na varvo ket
Biken e bro ar Vretonet ;
Vel gwechal zo brema e Breiz
Sent, tud kalonek, tud a feiz.

Jezuz zo Roue Breiz-Izel,
Mari hor Rouanez santel ;
Ra vo meulet dre ar bed holl,
Jezuz ha Gwerc'hez Remengol.

I.-P.-M. AR SKOUR,

Barz Itron Varia-Remengol.

Imprimatur.

Brioci 27 Junii 1868

J^h-Marie HUARD, Vic.-Gén.



La foi de Jésus-Christ ne périra jamais
Dans le pays des Bretons,
Comme autrefois, aujourd'hui en Bretagne,
Il y a des saints, des hommes de cœur, des
[hommes de foi.

Jésus est le Roi de la Bretagne,
Marie est notre sainte Mère,
Que Jésus et la Vierge de Rumengol
Soient loués d'un bout à l'autre de l'univers.

J.-P.-M. LE SCOUR,

Barde de Notre-Dame de Rumengol.

